

YF_0062_Kan ha diskan adarre

Ar wech kentan oan 'n em lakaet da gano da zansal
Oa er bloaz nao ha tregont deus Pier C'hwiban er Sal.

Ba'r sal Plogoneg moa kanet, ba Kerlessouarn ivez
Bet oan ba Tregoen Kergloff, ba Treubeuskont Plouie.

Er bloaz daou ha daou ugent oant' c'hwai deus Fransou Minez
Hennezh a gane mintin ha noz ken dudius ha ken gae.

Ganeomp oa aet an traou en-dro dreist-holl ba Kerunnez
Ne vize ket trist an dud er festou-noz war ar maez.

Ma contr Josef 'n oa lar't din pemp bloaz ha tregont zo
"Kemer Fransou Loui ganit da zansal ha da gano.

Fransou Loui Gall deus al Lanniou gwir Vreton paotr dilikat
Pa vez an dans o vont en-dro, e nij gant an imor vat.

Pemp bloaz goude oa lar't din gant Fransou Mari Gall
"Ma faot dit kaout ur c'haner kerzh da gaout Gwilhou Riwall.

Gwilhou a oa 'terc'hen plas ba Kerfeunneg Poullaouen
Sklaer e oa e vouezh gantan distagellet e lanchenn.

E fin ar bloavezh naontek kant pevar ha hanter kant
E Poullaouen oa savet konkour bras kan ha diskan.

Tri bloaz deus renk ba Poullaouen er bloaz war-lerc'h ba 'Speied
Ba'r C'hastell Nevez ha Gourin ganeomp kemend-all oa graet.

'Tre pemp ha seizh ha hanter-kant oa adsavet ar festou-noz
Lampat 'rae an dud ba'n dans, re yaouank koulz ar re gozh

Deus Poullaouen ha Sant-Herbot, deus Brasparzh da Blonevez
Ar mod kozh oa deut en dro da ve'an ar mod nevez.

Tre da Baris ha da Issy bar'r c'harr bras oamp charreet
Pedet oamp da zidual ar Vretoned divroet.

'N ur zifenn ar brezhoneg 'n ur gano a vouezh uhel
Kalz tud meump lakaet laouen enoret meump Breizh-Izel.

Setu ni digoue'et breman er bloaz nav ha per-ugent
Ha breman eo krog en-dro an drask gant he c'hanaouenn.

Lociz ROPARS